

# S.O.S. begoù-hir

(troet diwar S.O.S. dauphins, Crocolivre CE1, Nathan, gant S. Alliot gwirioù ar skeudennoù zo miret strizh gant Nathan)



- Neuñvial a rehomp kichen-ha-kichen, eme Tataig din ouzh en lakaat e vaskl, ha pa rin sin dit splujhomp ! Mat eo ?

- Maaaat eo ! emezon e-barzh ma zuba.

Aet oamp...

Pegen sklaer e oa an dour ha glas ! Pesked a bep seurt liv a dremene dindanomp. Brutal e oa !

Gwall blijañ a ra din mont da vale dindan-vor gant Tataig. Lakat a ra ac'hanon da welet mil ha kant tra, kregin, uioù-mor, seurezed-mor...

A-greiz-tout e santis ul lopadennig war ma morzhed. Ar sin ! Ober a ris un tenn-alan bras hag ul lamm-penn etrenek ar foñs, un tammig evel ar c'haniged.

Gwelet a reas Tataig ur steredenn-vor diouzhtu en traezh, ha lakaat anezhi em dorn. Da



neuze e krogas start em brec'h ouzh en diskouez un dra bennaket gant e viz... Ur beg-hir !

Ha hennezh d'hon c'hê, bras-bras oa ! buan, ha Tataig ha kas ac'hanon war-varr.




Pa lakjomp hon fennoù er-maez deus an dour e klevjomp kriadennigoù skiltrus ! Hennezh an hini a oa ! Aze e oa, daou vetr diouzhimp a-boan. Fromus e oa e benn, lemm-lemm e dent. Aon 'm boa.

Tataig ne seblante ket bezañ dinec'h ivez :

- Ne vez ket taget an dud gant ar begoù-hir sañset, a c'hagouilhas ouzh en dennañ e duba. Gwelloc'h chom war evezh ! Deomp da gê an aod !

Ouzh en neuñvial e sellis a-dreñv dimp : oc'h heuilh ac'hanomp e oa ! Ha ma tantje ma divhar ? Seizhfollet gant ar soñj-se e ris forzh petra gant ma botoù-palvek.



- War ma zreid on ! eme Tataig a-benn ar fin.

Kregiñ a ris en e gerc'henn, berr warnon, pa savas ar beg-hir er-maez deus an dour a-greiz-tout, ha hennezh ha taol kriadennigoù c'hoazh ouzh en hejal e benn war-raok ha war-dreñv.



- Lâret e vefe en deus c'hoant da lâret un dra bennaket dimp, a guzulikas Tataig ouzh en lakat e vaskl war e dal.

- Splujañ a ra ! Emañ o tosteiñ dimp ! a yudis.

Gwelet a raemp anezhañ a-dreuz an dour. Ouzh hon zreid e oa. Gant e veg e vountas divhar Tataig ! Komprenet 'm boa, c'hoant en doa da lakat ac'hanomp da vont da heuilh

anezhañ ! Ne chomis ket da gompren pelloc'h, tapet a ris krog en e askell-gein, ha kaset e voen gantañ !

- Pablo ! a grias Tataig. Laosk anezhañ !

Re diwezhat e oa... Karzhañ a rae an delfin, stumm warnañ goût da belec'h ec'h ae. Hedañ an aod ! Regiñ an dour a raemp ken a findaone. Tennañ ma alan, c'hoant c'hoarzhin. Flour e oa e groc'hen ouzh ma divhar, ha ma c'halon a oa o lopata e-barzh



ma jave.

Arri e oa Tataig war an aod, ha heñv redek ken a rae e divrec'h savet gantañ. Kaset e oan e-barzh un ouf didud. A-greiz-tout e chomas difiñv ar beg-hir dirak unan bihan all aet start etre div roc'hell ! E hini bihan e oa ! O ! Un dra bennaket a oa en e veg !

Buan e tennis ma zraoù-splujañ ha tosteiñ dezhañ. Un tamm metal merglet a oa start etre e javedoù. Tizhet e oa e staon. Ur glukadenn. C'hoant gouelañ. Eüruzamant e welis



Tataig o redek ahont. Arri e oa, berr warnañ, reudet e fas gant ur waskadenn.

- Pablo ! Mont mat a ra ? a c'houlennas ouzhin.

- Me, ya. Hemañ n'a ket mat 'vat ! emezon ouzh en diskouez an delfin bihan.

- Gant al loustaj-mañ en e veg n'hall ket debriñ



ken, eme Tataig kerkent. Arri eo dinerzh. Han-se emañ amañ moarvat.

Dindan un nebeud segondoù e tapas Tataig lemel ar c'hozh-houarn.

- Ale, ez eomp da dennañ anezhañ ac'hann ! Tap krog en e benn, ez an d'ober kemend-all en e lost.

Lakaat a ris ma divrec'h tro-dro d'e c'hoûg ouzh en guzulikat :

- Na rez ket gwad fall, yannig !

Digeriñ e zaoulagad a reas an beg-hir bihan. Minc'hoarzhin a ris outañ ha delc'hen da gomz.

- Kalonek out, kreñv out...

- Prest out ? a c'houlennas Tataig. Ez an da gontañ betek tri ha lakaet e vo en dour !

Unan, daou...

Ponner e oa hor c'hamaradig. Dont a rejomp a-benn da vountañ anezhañ en dour 'vat.



Diouzhtu e tostaas e vamm dezhañ ha frotañ he fenn ouzh e hini. Difiñv e chome an hini bihan 'vat. Flourañ a reas anezhañ ul laziadig ha, dousik, en em lakas an hini bihan da fiñval.



Sovetaet ! Sovetaet e oa ! Nag eürus e oan, ha fier ! Briata a ris Tataig. Fentus e vez penn Tataig pa vez fromet.

- Ma ! emezañ. Poent eo mont d'ar gêr. N'o deus ket ezhomm diouzhimp ken !

Tataig ha me a oa o neuñvial kichen-ha-kichen pa ziflukas hon daou gamarad nepell diouzhimp a-greiz-tout ! Ul lamm kaer a rejont. Plaouf ! Hag i karzhañ etresek ar mor don.

Biken n'ankouain anezhe.



N'EUS KEN